

# En Ifern yen ar brezel gant Sympathie pour le diable

**Paul Marchand, kelaouer brezel, ha dre ar film-se, sevenet gant Guillaume de Fontenay, e istor e-doug ar seziz war Sarajevo etre ar bloavezhioù 1992 ha 1993, er goañv. Sed aze ur brav a film, yen, kriz, kalet, diwar-benn an darvoudoù skrijus-se, hag ur c'helaouer hep e bar d'ar poent-se, paket e gwask etre e vicher, e heug o welet diseblanted ar gumuniezh etrebroadel e-keñver an dalc'h-se, hag e c'hoant d'ober un dra bennak evit dont war sikour an dud a wele o kouezhañ tro-dro dezhañ, falc'het gant boledoù dall tennerien didruez.**

Sarajevo, miz Du 1992. Brezel zo. Freuz ha reuz e pep lec'h. Tennoù fuzuilhoù, boledoù o sutal, kanoliadeg, trouzioù moug ha pounner an obuzioù o tarzhañ, tud o krial, tud o tec'het kuit rak boledoù dall ar "sniperien". Seziz zo bet lakaet war Sarajevo gant an arme serb, ha na den na tra ne c'hell mont er-maez eus ar gêr villiget. Un anaon, ur verzherinti ! Amañ hag ahont, tud stlaket war al leur, gwad o redek war ar pavez, tud tizhet en o c'hig, gar pe vrec'h bep a lec'h, diframmet, tud skoet en o spered, daoulagadoù skoelf en o fennoù dislivet gant an aon, an naon, an diouer a voued, a zour, a bep tra. N'eus ket tredan ken kennebeut, hag ar goañv zo. Diroll eo ar walenn a gastiz-se ma'z eo ar brezel war gêr Sarajevo. Met petra zo kaoz da gemend-all a grizder, just e-tal hor c'hichen ? E-tal-kichen dorioù Europa ?

Aze emañ Paul Marchand (Niels Schneider), kelaouer brezel, e-kreiz ar bec'h, e-kreiz ar freuz bras-se. Boned gloan sanket don gantañ war e benn, segalenn gantañ en e c'henoù, o fumiñ emañ ar paotr, o fumiñ e vez atav, hep ehan. Da bep hini d'ober ar pezh a c'hell da derriñ e anken, ha da drec'hiñ war e fromoù. Paul Marchand, eñ, ne vez ket e zaouarn gantañ en e c'hodelloù. Taol e-kreiz hent bras Sarajevo, tizh bras gant e oto lañset d'ar pevarlamm ruz, o tichekal an dennerien dall, an "dTchekniked", taol e zorn dehoù krog en ur stilo, hag e zorn kleiz en ur c'harned bihan, ha skrivañ, skrivañ hep ehan, c'hoazh hag adarre, kement a c'hell gwelet, klevet, c'hoant gantañ taoler ouzh genoù ar bed-holl hon

diseblanted, rak petra zo gwashoc'h eget diseblanted an den ouzh e vreur ? E vreur toc'hor, e vreur o leñvañ, e vreur gwallgaset hag o vervel ? Met aze e-giz-se ne 'z eus gantañ netra ebet all nemet e garned, e stilo, hag e lunedoù war e fri, kement ha gwelet fraeshoc'h a se peged divalav eo ar brezel, peged divalav e c'hell an dud ober an eil re d'ar re all. Ya, fum 'ta Paol, fum 'ta ! Pet segalenn a ya ganez-te er mod-se bemdez ? Pet segalenn a ya ganez-te pa 'z ez d'ar morg da welet pet den a oa bet nevez lazhet en derc'hent ? Hag en disklêriañ, c'hoazh hag adarre, dreist al linennoù, Serb, Kroat pe vuzulman, dreist holl linennoù ar bed, krial peged lous eo ar brezel !

War e hent e teuo dizale Boba (Ella Rumpf), ur vaouez eus Sarajevo, Serb anezhi. Gouest eo da gaozeal eizh yezh, serb-kroateg, saozneg ha galleg, koulz ha ruseg, italianeg ha spagnoleg. Er mod-se e sikouro Paul da vont dreist al linennoù, serb hag all, dezhañ da c'hellout kontañ, diskouez, c'hoazh hag adarre, an dud keizh-se diskaret didruez gant boledoù hag obuzioù dall tennerien skoachet tu bennak e-barzh savadurioù bras kêr Sarajevo. "A-raok ne veze ket anv gwech ebet eus relijion !" eme Voba. Petra 'ta zo krog enno holl ? Gant peseurt ideologiezh flaerius eo bet gounezet o ene ? Pa vent holl asambles didrabas a-raok ? Petra zo bet 'ta evit mont betek en em lazhañ an eil re ar re all ?

Hag ar brezel oc'h ober e reuz adarre dre bevar c'horn Sarajevo. Re bar d'ur gorventenn ha na c'heller ket lakaat

anezhi da chom a-sav, hag o kas ganti war he lerc'h kement tra a zo war he hent. Tud skoachet en o ranndioù, souchet o fenn ganto, da ziwall a vez atav rak war var e vezer hep ehan da bakañ ur boled e-kreiz e benn en ur dremen hebiou ur prenestr. Piv a oar ? Trumm, kriz, kalet. Brezel war an deiz, ebatoù e-kreiz an noz, an dra-se e oa ivez Sarajevo e-doug ar seziz. Peged sot ar brezel. Tud o fringal asambles, e-barzh toulloù noz Sarajevo, e-kreiz an euzh, petra 'r varn ? Epañ, dañsal, chou-rañ, war don *Fade to Grey* gant Visage. Hag o krial o spi en ur bed gwelloc'h ! C'hoant peoc'h e-touez an dud, c'hoant gwelet an armoù o tevel. Kenavo d'an armoù, ha peoc'h ganto ! Ha Paul, ha Boba o lidañ oferenn ar c'horfoù diouzh an noz, netra ebet ne vo heñvel ken diwar neuze evit Paul. Gant Boba eo krog da vont war un hent all, en tu all d'e vicher a gelaouer brezel. Ne chomo ket diseblant ken. Ne vo ket evit padout ken gant sifroù, gant komzoù goulo : "Hiziv e Sarajevo ez eus bet lazhet 31 den, va digarezit, 33 den, ha kouezhet ez eus bet c'hoazh un 330 obuz bennak..." Nann, Paul ne bad ket ken gant ar sifroù, rak bremañ, gant Boba, ec'h anavez an dud e kêr Sarajevo. N'eus ket anezho estrañjourien dezhañ ken. Deut eo da vezañ unan anezho eñ ivez, aet eo ar brezel ennañ, en e wad, paket eo eñ ivez e-kreiz al lagenn vras-se. Ha klask ober un dra bennak evito a raio, evel unan anezho, er c'hontrol d'ar FORPRONU a chom pell. Ne raio ket evel ar soudarded o zokarnoù glas-se en doa bet gwelet ur wech o teviñ fioul pa c'helljent bezañ en roet d'an dud, dezho da gaout dour gant

pompoù o vont en-dro dre fioul just a-walc'h ! Ne raio ket evel an daou soudard o zokarnoù glas-se a c'hellje bezañ bet war sikour tud kuitzez dezho da vezañ lazhet gant milisianed, ha padal, n'o doa ket graet, ha drouklazhet e oa bet ar c'haezh tud-se dirak o daoulagad... N'eo ket evit gwelet ken tud, pe bras pe bihan e vefent, falc'het dirak e zaoulagad, evel ar paotr bihan-se un deiz m'edo oc'h ober ur gwel d'ur c'houblad mignoned da Voba, ha paket ur boled e-kreiz e benn gant ar paour-kaezh bihanig p'edo o c'hoari er gegin, ha tarzhet e empenn, gwad strinket e pep lec'h ouzh an arreboueri, ouzh al leur, ouzh ar mogerioù, e dud o krial war e dro, redadeg foll o kas anezhañ d'an ospital, en aner, pa oa marv-mik o mabig bihan. Nann, Paul, diwar neuze, asambles gant Boba, zo perzh eñ ivez e-barzh kannoù Sarajevo, ha ne c'hell ket dont war e giz ken, na ne raio. Ha pourchas armoù da vignoned Boba, dezho da ziwall o buhez. Klask terriñ ar seziz war Sarajevo. Rak e-giz en doa lavaret d'ur c'henseurt dezhañ : "We are here, brother, we are here !..." ("amañ emaoamp, va breur, amañ emaoamp").

Paul, Boba hag o c'hompagnon, o zri er Ford Sierra, tizh bras ganti war an hent bras o tichekal tennerien ar "Sniper Alley" e-kreiz-kêr Sarajevo... En deiz-se avat, edo an Ankoù ouzh o gedal en ur c'horn-tro. Un tenn, trumm, ur strakadenn sec'h, ha tizhet e vrec'h gant Paul, gwad o strinkañ diouti, ha prestik goude, Paul en e c'hourvez war an hent e-kichen e oto, e wad o vont d'en em veskañ gant gwad bugale Sarajevo, da viken... Echu an dro, ar boled-se a vo bet an hini diwezhañ evit Paul, re e oa dezhañ, re...

Sarajevo a vo bet merzheriet e-pad tost da bevar bloaz, etre 1992 ha 1996. Daouzek mil den a oa bet lazhet, hanter kant mil den gloazet en o c'hig, ha kalz muioc'h en o spered, war don *Fade to Grey* gant Visage, pe war don *Brothers In Arms* gant Dire Straits.

Kit da welet ar film-se, yen, kriz ha kalet, evel ar brezel, evel ar brezelioù, anezho trouzioù hunvre ur bed... gwelloc'h ? Trouzioù birvilhet evit hejañ hon diseblanted kablus ? Tost da bemp ploaz warn-ugent zo dija, ken pell ha ken tost deomp c'hoazh. Ha gwellaet e vefe da Europa abaoe ? Ha gwellaet e vefe d'ar bed abaoe ?

**Benead Vernon**

**Sympathie pour le diable**, film sevenet gant Guillaume de Fontenay (2019).



## Berr-ha berr diwar-benn Paul Marchand

Paul Marchand a oa bet ganet d'ar c'hentañ a viz Here 1961 en Amiens, hag en em lazhet en doa oc'h en em grougañ en e ranndi e Pariz d'an 20 a viz Even 2009. Bet kelaouer brezel diouzh e vicher eo chomet brudet evit e gelaouadennoù e Liban hag e Yougoslavia-bet. War-lerc'h ar brezel eno e oa en em lakaet da skrivañ. *Sympathie pour le diable* zo unan eus e romantoù, e daou damm : *Sympathie pour le diable* (1997) ha *Sympathie pour le diable, Morituri te salutant, Tome 2* (1999), embannet gant Lanctôt éditeur.

Kustum e oa da lavaret e ranke ur c'helaouer brezel en em gavout war al lec'h e-kreiz ar bec'h dres d'ar poent resis ma oa difennet outañ bezañ ennañ.

An ifern koulz hag ar baradoz a c'hell bezañ er bed-mañ, war an douar. An droug koulz hag ar mad. Piv a ra anezho, nemet an dud o-unan ? Peotramant eo an eil a gas atav egile war e lerc'h, rak penaos priziañ ar mad pa n'ouezer ket petra eo an droug ? Petra a c'hell bezañ ar baradoz pa n'ouezer ket petra eo an ifern ? Ha diremed e vefe ? Hag an daou dra asambles a yafe d'ober mab-den, hag an daou dra asambles a yafe d'ober hor buhez, tro-ha-tro, a bep eil, evel momeder un horlaj ?